

# O AOTROU! ( SALM 8 )

Komzou : Job an Irien

Muzik : René Abjean

O Ao-trou, on Ao-trou, Na kaer eo da An - (n)o Dre an dou - ar a - bez!

- |   |  |
|---|--|
| 1. Uhelloc'h eged an neñvou da ..... splann - der,        | 1. Kanet gand genou ar vugale hag.. ar ba - bi - gou : |
| 2. Pa welan an neñv, labour da ..... vi - zied,           | 2. Al loar hag ar stered ..... krou - et gan - (n)ez,  |
| 3. Hel lakeet az-peus a-vec'h izelloc'h eged eun Dou - e, | 3. O kuruna anezañ a ..... c'hloar hag a sked ;        |
| 4. An oll zaout ha ..... deñ - ved,                       | 4. Hag oll loe - ..... ned ar mê - ziu,                |
| 5. Gloar da Zoue, on Tad oll-c'hal - ..... lou - deg      | 5. D'or Zalver Jezuz-..... Krist on Ao - trou,         |

- |   |  |
|---|--|
| 1. Moger a-eneb da ene-..... bou - rien,              | 1. A zioula da enebourien..... di - rol - let. |
| 2. Petra eo an dén, ma talhez koun a-..... ne - zañ,  | 2. Ha mab an dén, ma rez..... van ou - tañ?    |
| 3. Hel lakeet az-peus mestr war oberou da za - ouarn, | 3. Ha lakeet pep tra din-..... dan e dreid :   |
| 4. Laboused an neñv ha pesked..... ar mor,            | 4. Kement a vale e gwenojen-.... nou ar mor.   |
| 5. D'ar Spered a rén 'n or c'ha-..... lon - (n)ou,    | 5. A gantvejou da gantve-..... jou. A - men.   |

**Diskan : O Aotrou, on Aotrou,  
Na kaer eo da Ano  
Dre an douar a-bez !**

1. Uhelloc'h eged an neñvou da splannder,  
Kanet gand genou ar vugale hag ar babigou :  
Moger a-eneb da enebourien,  
A zioula da enebourien dirollet.
2. Pa welan an neñv, labour da vizied,  
Al loar hag ar stered krouet ganez,  
Petra eo an dén, ma talhez koun anezañ,  
Ha mab an dén, ma rez van outañ ?
3. Hel lakeet az-peus a-vec'h izelloc'h eged eun Doue,  
O kuruna anezañ a c'hloar hag a sked ;  
Hel lakeet az-peus mestr war oberou da zaouarn,  
Ha lakeet pep tra dindan e dreid :
4. An oll zaout ha deñved,  
Hag oll loened ar mêziou,  
Laboused an neñv ha pesked ar mor,  
Kement a vale e gwenojennou ar mor.
5. Gloar da Zoue, on Tad oll-c'halloudeg  
D'or Zalver Jezuz-Krist on Aotrou,  
D'ar Spered a rén 'n or c'halonou,  
A gantvejou da gantvejou. Amen.

Ô SEIGNEUR!

R: Ô Seigneur, notre Dieu  
Qu'il est grand ton nom  
Par toute la terre !

1. Jusqu'aux cieux, ta splendeur est chantée  
Par la bouche des enfants, des tout petits :  
Rempart que Tu opposes à l'adversaire,  
Où l'ennemi se brise en sa révolte.
2. A voir ton ciel, ouvrage de tes doigts,  
La lune et les étoiles que Tu fixas,  
Qu'est-ce que l'homme pour que Tu penses à lui,  
Le fils d'un homme, que Tu en prennes souci ?
3. Tu l'as voulu un peu moindre qu'un Dieu,  
Le couronnant de gloire et d'honneur ;  
Tu l'établis sur les œuvres de tes mains,  
Tu mets toute chose à ses pieds :
4. Les troupeaux de bœufs et de brebis,  
Et même les bêtes sauvages,  
Les oiseaux du ciel et les poissons de la mer,  
Tout ce qui va son chemin dans les eaux.
5. Gloire à Dieu, notre Père tout-puissant  
À notre Sauveur Jésus-Christ, notre Seigneur,  
À l'Esprit qui règne en nos cœurs,  
Pour les siècles des siècles. Amen.